

Tirage non signalé dans OLLIVIER



cf 293

CHANSON AN AMOUROUSTET

Chilaouet, ma mignonet,
Chanson an amouroustet
A so gant eur c'hernevad 'vit an deio composet.

Amouroustet so eur guer
Hac a so dous ha tener
Caus he da vil nec'hamant hag ive da vil miser

Pa vo an nos pe an de
Daou zen yaouanc a goste
Quent ma c'houfeong doare he c'harivo gante.

Ar pot a gause bra
Hac ar plac'h a neus joa,
Evit bezan evurus na fot nemert eun dra.
Amouroustet a ra dhe
Dimezi hep dale.

Pa vouing neve eureuget,
Vad a ra dhe nem velet
Casi ne ra mert unan an ozac'h hac ar vreg.

Quen bras e ar garante
Ha quen bras an amitie
Neus an eil vit eguile hag en nos hag en de.
He ra deze lavaret
Pelzo cleyemp beza dimeet.

Tudo yaouanc, me ho ped,
Memestra divoallet
Liessoc'h so dimezet vit a so a eset.

Goelet a meump a vejou
Cals a chanchamanchou.
Er menajou e caver bep sort ambarassou,
Pa zeu en tieguesou
Cals deus a bouponou.

— 2 —

Unan a c'houlen crampoës
Hac eun al gallettes
Eun al so en he gavel ho clasq donet er mes

Ar vreg so dre an ti
Vel pa ve etourdi
Na neus den evit clevet raison vad ebet ganti.
Fachet hen deus he fried,
Adieu d'an amouroustet.

Tud yaouanc, mar em c'hredet,
Lacaït eves, diouallet
C'houi he an evurusan tud a so voar ar bed.

C'houi so dre ar pardonniou
Ha dre an assambleou
O dansal, o c'hebattal, o c'hefan taquennou.
Eun den yaouanc, mar gue fur,
So parfet he blijadur.

Hac ar re so dimezet
An darn vuyan meus goelet
A vanque eun dra benag dalc'hmad do evurustet.

Darn so hac a laer ar yalc'h,
Ha darn al e ya voar varc'h,
Real a gar ar chopin, quen a vont mev eoalc'h.
Tud yaouanc, mar dimezet,
Choaset tud fur ha parfet.

PA HI LERER EN EUN EURED A HELLER AJOUTI

He neur dont da finissan
Souhaiti ferm a ran
Yec'het dan daou zen neve, chans ha prosperite.

Men ho ped, camaradet,
Vit eur farç ne fachet quiet;
Permettet a badinal en tre ar vignonet.

Graç dimp da nem gavet c'hoas
Joaus evel biscoas
Ben an de-ma pen eur bla, ebars ar memes plaç,
Ho strinquan gant hon goeren
Da yec'het ar poupon.

LENEINDRE.